

MARI GOLLET  
pe

# Son MARI VASTROUILH

I  
Me 'zo paouez koll va mestrez,  
Et eo kuit deuz ti he zad !  
Larit d'in ma peus hi gwelet  
Ma he c'havin-me timat...

DISKAN

Keuz am eus da Vari Vastrouilh !  
Keuz am eus da Vari gêz !  
P'lec'h an diaoul he c'havin breman ?...  
Kollet 'm eus va Mari gêz !

II  
Mari Vastrouilh a zo luchez,  
Eur fri tougn 'zo ganti c'hoaz,  
Lagad pikous, pikou panez,  
Ha me oar-me petra c'hoaz !...

(Diskan).

III  
Kalz re hir a oa he lostenn,  
A lare an teodou fall...  
'Ran ket forz eus pez a laront :  
Mari Vastrouilh 'dalv eun all !...

(Diskan).

IV  
Kreon eo Mari 'vel eur gazek  
Hag a fring e-kreiz ar prad...  
Spontet vefec'h ha pa welfec'h  
Pegen hir 'man he daoudroad...

(Diskan).

V  
C'houez al ludu 'zo gant Mari,  
Na 'vit se n'eus ket he far  
D'ober krampouez gant bleud malet  
Laez ar saout ha viou yar.

(Diskan).

VI  
Me a varvo ma n'he c'havan !  
Va c'halonad 'zo leun-barr !  
Klaskit Mari va zud karet,  
Kement hini 'zo d'in kar !

DISKAN

Keuz am eus da Vari Vastrouilh !  
Keuz am eus d'am Mari gêz !  
P'lec'h an diaoul he c'havin breman ?...  
Kollet 'meus va Mari gêz !!